

«POBL VREIZH»

B.P. 304

29273 BREST-CEDEX

Kelaouenn visieg

Komanantouù

Boutin : 20 L. Skoaz : 30 L

C.C.P. 2746-79 Rennes

DU 1976

NIV. 82

2^{LUR} POBL VREIZH

Al lanw du

N'eus ket bet trawalc'h gant gwall-zarvoud an Torrey-Canyon e 1967, na gant heni an Olympic-Bravery, er goañv tremenet, ewid lakaad pennoù skañv Paris hag heni ar prefed amañ da furaad ha da finaad. Aet d'en em strinkañ ouzh reier Enes-Eussa, e oa chomet an Olympic-Bravery ouzhpenn ur mis eno, a-raog bezañ brewet gant ar wall-amzer. Ha neuse e krogas ar fuel da verañ diouzh korf ar vag, ha da saotrañ aodoù ha reier Eussa. Hag ar prefed o lâred penaos «ne oa ket aes» dont a-benn eus ur sort tra, ken dic'hortos... Ken dic'hortos ! Ouzhpenn mis e oa chomet ar vag war reier Eussa, a-raog bezañ brewet ! Ha bremañ, war-lerc'h gwall-zarvoud ar Bohlen, ha gwellaet eo bet an traoù ? Tamm ebed. N'eo ket raparet o bag-saveteiñ da vartoloded Enes-Sun : emaint o c'hortos abaoe misioù ha misioù. Ne vez ket roet da Vreizh kement a zo ezomm ewid derc'hel penn, kerkent, pa vez saotradurioù sort-se. Ne vez ket lâret da boblañs Vreizh na d'ar vartoloded penaos emaint dalc'hmad dre har gweled saotradurioù sort-se kehid ha ma chomo ar bagoù bras karget a fuel da dremen ken tost all ouzh



Michaël Pobl Vreizh

war aodoù Breizh...

Breizh hag ar Vretoned n'int mad nemed da zegemer touristed diouzh an hañv, sou-darded a-hed ar bloaz, hag al lanw du diouzh ar goañv... Ema porzh kenwerzh Brest o vond en-dro doussig, doussig... tra ma tremen bagoù e-leizh ken tost all outañ...


Pessort vad 'ra ar bagoù-se da berzhier-mor Breizh ? Netra. Sort.

D'ober petra kaoud ur prefed ? D'ober petra kaoud ur sekretour-stad e karg eus an transportoù ? Tud didalvez, a-grenn. Lakaad ar Vretoned d'ober war-dro o zraoù zo

Ewid ar galloud kapitalist parisian, n'eus ket eus aodoù Breizh, n'eus ket eus porzhioù Mor Breizh, n'eus ket eus ar pesketaerezh e Breizh...

Ewid ar mare, ma n'hon eus ket petrol, ma n'hon eus ket industrioù, lanw du hon eus evel-kent ! Setu ase prof plijus ar c'hospitalism etrevroadel !

Ar stur da besketaerien, da vicherourien, da oll labourerien Vreizh ! N'eus ket gwelloc'h ewid ar Vretoned d'ober war-dro traoù Breizh !



Plañ Barre pe an tenn o vont er c'hleuz

Ewid ar wech kentañ abaoe ma'z eus eus ar Vêd Republik, en deus anzavet ar gouarnamant, dre vouezh ar C'hentañ-Ministr, Ministr an Arc'hant, penaos en deus c'hwitet e bolitikerezh arc'hant ha penaos ez eo aet ar c'hwezhañ-arc'hant war vuanaad, en desped da ziv steufvenn-gempouesah VGE, en Kerzu 1972 ha Kerzu 1973.

«A-benn ar fin, en deus disklêriet Barre, emaoomp o vont da stagañ gant ar c'hudennoù gwirion». Pebezh flac'had d'ar re a oa e karg en e raog ! Kenkoulez lâred penaos n'o deus graet ar re-mañ nemed c'hoari an ambusetes ganeomp. Ac'hanta ! E pelec'h ema ar c'hudennoù gwirion neuse ?

Tri fal en deus merket Barre diragzañ, e termen berr :

- Bihanaad tamm-ha-tamm kresk ar prisiou (ne savo nemed da 6,5 % e 1977)

- Adreizhañ Kempoues an eskemmadennoù-diavaes ;

- Harpañ an ekonomiezh hag ar goprañ.

Semblantoud a ra an traoù bezañ sklêr ewid Barre : a-raog peb tra, chom mestr war an arc'hant, miroud ouzh al lur gall a vezañ krignet (kollet en deus 38 % eus e dalvoudegezh e-keñver an Deutsche Mark en ur ober

13 vloaz). Evel an darn vrasañ eus ekonomisted ha pennoù politikel an tu dehoù, ez eo heget Barre gant ur soñj nemedkén : distroñ d'ur moneiz stabil ha lakaad al lur gall kehid-ha-kehid gant ar pezhioù-moneiz all war ar marc'hadoù etrevroadel (e-lec'h bremañ e vez feuriet al lur, dilliamm, gant paotred an eskemmoù, abaoe m'eo deuet e-maes «ar sarpant moneizel etrevroadel», a-lesse al lamm a vez roet dezañ war ar marc'hadoù eskemm).

En desped d'e gomzoù, ne c'hell ket Barre stagañ gant ar c'hudennoù gwirion. Ema ar re-mañ plom e-kreis ar frammadurioù, ha n'eo ket hebken savet diwar an degouezioù (pessort degouezioù ? sav-diskenn ar moneiz, e termen berr, diwar an trafikerezh etrevroadel). Bez e c'hell ekonomiezh ar Frañs dont war-c'horre he bec'h ? Bez e c'heller lakaad un termen d'an dilabour, lakaad ar goprañ en e leun-barr, heb krignañ live-buhez al labouremen ?

Ema ar gouarnamant o klask lakaad an oll da grediñ ez eo pouesussoc'h kudennoù an arc'hant eged an dilabour, ha deuet eo a-benn, tamm-pe-damm, ma kreder sondajoù 'zo, ha forzh pegen tæer eo bet emzistaol ar sindikadoù hag ar strolladoù politikel kleiz a-eneb da steufvenn v-Barre.

A-boues bras eo a dra sur, kudennoù an arc'hant e-barzh an ekonomiezh a-vremañ : anzav a ra an oll kement-mañ. Red eo degass da soñj avad ez eo ar re nemeto e c'hell ur gouarnamant dehoù tapoud krog warno. Ma vefe adreizhet ar frammadurioù, e vefe eilpennet an ekonomiezh kapitalist, hag e vefe red ober diouzh steufvenn ekonomikel ar strolladoù kleiz : kavoud a raer un damskeud anezi e-barzh ar Program Boutin; chom a ra skort ha diglok ar raktress-se, ha moarvad gwall ziaes da seveniñ evel m'ema, rag isistimañ 'raer ennañ pegen kreñv eo ar vourc'hiselezh d'en em zifenn, ha pegen sonn eo ar frammadurioù burokratel bet savet gant ar stad abaoe 1958, warni dorn ponner De Gaulle bete vremañ c'hoazh.

Bralañ ar frammadurioù zo d'ober. Lakaad da baeañ ar re a c'hell ober, ar kapitalisted, war-boues sevel un tailh war ar c'hevala (capital) : un tailh «digoulz», eme v-Barre (an digarez kêr !). Ne vo degemeret ar «c'henemglew broadel», nemed pa vo bet eilpennet penn-da-benn lesennoù an telloù (fisc), pa vo bet lakaet an tailhoù war-eeun (ar re a vez savet war ar paeoù, war ar gounidoù ha war al leveoù diwar drafikerezh) da vezañ pouesussoc'h eged ar re war-zieun (TVA, taossoù a beb sort). Evel-se, 'vez kont e-barzh meur a vro eus Europa, broioù n'int ket sossialist memes, renet ma'z int abaoe degvleadoù gant strolladoù sossio-demokratel (Kement-mañ en diavaes eus ar broadeladurioù, eus ar c'hontrol war an embregerezhioù (añtreprisoù), a lakfe an ekonomiezh da vezañ sossialist un disterañ...).

Tapet eo gouarnamant VGE en e bej e-unan : ne c'hell ket stagañ gant kempenn ar frammadurioù (ar pezh a ra RFA abaoe pell zo) ; ma ra, e vouzho outañ ar c'hlassoù hag ar rummadoù sossial m'eo ar gouarnamant just a-walc'h ar c'hemennad anezo (ar c'hevala meur monopolist), pe m'eo


dilennet ganto (PME, sternioù, klassoù-kreis). Pa weler peheni eo emzistaol Kreisenn ar Sternioù (ar CGC), e ouier kercent, diarvar, penaos n'eo ket prest ar re-mañ da assantiñ bezañ lakaet er memes stad hag o c'hompered a Vreizh-Veur ne a Skandinavia.

P'ema gwall dost ar mouezhiadegoù ti-kêr hag ar re gannaded, ne c'hell VGE mont dezi nemed a-gaouadoù, disingal : c'hwitañ ray an traoù gantañ evel ar gwechoù all. Da skwer, pa vo bet lakaet ur c'hresk bras war bris an essañs, e vo lakaet an dud da roullañ nebeutoc'h ? Arabad ankouaad penaos n'eo ar c'harburantoù nemed an 20 % deus an idrokarburou a vez dewet ; arabad ankouaad ez eo ar wetur dre benn un dra red, ha n'eo ket ul «luxe» (pa ne rafe nemed lakaad anad ez eus un arallekadur, pezh a ziskouez an tec'h beb week-end pell diouzh ar c'hêrioù bras, ma sav an heug anezo e miliadoù a gêris). Ne c'heller mul, hiziv an deiz ; diouveriñ ar gweturioù. Forzh penaos, herwez klewed paotred ar petrol, ne bad an digresk war ar c'husumifñ essañs nemed un teir sizhun bennag ; goude-se e vez ankouaet ez eus bet ur c'hresk war ar pris, ha bec'h d'an essañs en-dro ! A-benn ar fin ur c'hresk war bris ar petrol ne ra nemed boueta ar c'hwezhañ ha n'eo ket e c'horrekaad eo a ra.

Barnet eo Barre ha VGE d'an diefedusted, ha diwar se e tapont div c'had gant ar memes tenn, pebezh taol-kêr !

1 - Lakaad a raont o elektourien da vezañ displijet (e-touesk ar re zisplijet ema Chirac, bet ebeul Pompidou, savet c'hoant ennañ bremañ da vont war ar renk ewid bezañ president diwezatac'h), rag displijet e vint pa vo kresket an tailhoù war ar goprou uhel (ha ne vo graet droug ebet da wirioù-dreist ar c'hevala).

2 - Leuskel ekonomiezh ar Frañs e-barzh ar vuilhenn a raont, hag ewid pell c'hoazh, diwar goust ar familhoù, ar



Klitched Pobl Vreizh

NOTENNOÙ

ar wech, gwechall, gwechoù zo ; ar wezh, gwezharall, gwezhoù zo ; ar c'hwezhañ-arc'hant : ar c'hwezhiñ-argant ; l'inflation monétaire ; war : ar ; steufvenn-gempouesah : plan de stabilisation ; adreizhañ kempoues an eskemmadennoù diavaes : rétablir l'équi libre des échanges extérieurs ; ar goprañ : l'emploi ; heget : obsédé ; gant : ged ; feuriet : coté (le franc est coté) ; dilliamm : libremment (sans rapport avec les autres monnaies) ; ar marc'hadoù eskemm : les marchés des changes ; frammadur : structure ; savet diwar an degouezioù : surgissant de la conjoncture ; sav-diskenn ar moneiz : fluctuations monétaires ; an trafikerezh etrevroadel : les spéculations internationales ; lakaad ar goprañ en e leun-barr : assurer le plein emploi ; live buhez : niveau de vie ; emzistaol : réaction ; skort : insuffisant ; raktress : projet ; seveniñ : exécuter ; tailh : impôt ; digoulz : inoportun ; ar c'henemglew broadel : le consensus national ; an

tailhoù war-eeun, war zleueun : les impôts directs, indirects ; ar gounidoù : les bénéfices ; al leveoù diwar drafikerezh : les revenus spéculatifs ; taossoù : taxes ; abaoe degvleadoù : depuis des décennies ; broadeladur : nationalisation ; ar c'hemennad : le mandataire ; dilennet : élu ; Kreisenn ar Sternioù : la Centrale des Cadres ; diarvar : sans hésitation ; mouezhiadegoù ti-kêr, -kannaded : élections municipales, législatives ; ar wetur dre benn : la voiture individuelle ; arallekadur : aliénation ; ar c'husumifñ : la consommation ; boueta ar c'hwezhañ, e c'horrekaad : fournir un aliment à l'inflation, la freiner ; diefedusted : inefficacité ; ar goprou uhel : les hauts salaires ; gwirioù-dreist : privilèges ; ar c'henfeur : le rapport, la proportion ; interestoù ar c'hevala postet : les intérêts des capitaux investis ; adiañs : relance ; ma-c'homerezh : exploitation ; kil-stourmer : réactionnaire.

re baour, a ranko c'hoazh tailhañ, ha tailhañ dalc'hmad...

Chom a ra un dachenn koulskoude, ma c'hello re an tu kleiz en em gann warni hardizh : heni an digresk war an disingaldierioù sossial, ma ya ar maout gant ar Frañs en Europa. Ofisiel eo, skrivet eo e-barzh «rapport» an OCDE : ar re binwidikañ, da lâred eo 1/5 deus ar sitoaianed, ez eus gante 11,2 gwech muioc'h a beadra eged na'z eus gant ar re baourañ (ar 1/5 eus ar sitoaianed ive).

En Holland ne sav ar c'henfeur-se nemed eus 1 da 5 ; eus 1 da 7 e RFA. Setu emma trec'h ar Frañs war Spagn Franco : eno, 1 da 10,7 ! An 20 % deus ar boblañs dezo ar peadra isellañ ne ya ganto nemed 4,2 % deus al leveoù eus o fezh ; an 20 % dezo ar gounidoù uhelañ : 47,1 % !!

Anad eo penaos ne vo ket gwall stanket ar fos don a zo etre an daou rumm gant ar pezh en deus divisset Barre : da lâred eo, lakaad un taoss (dister !) war ar paeoù uhelañ. Rag ouzhpenn ar paeoù a gaver e-touesk al leveoù bras : bez' emma ive interestoù ar c'hevala postet, ar gounidoù industriel, leveoù ar c'henwerzh (hag ar «servis-soù»), ma chom ar vrasañ lodenn anezo en diavaes eus kontroll ar «fisc».

E-barzh un hent div wech dall ez eo eet Giscard hag e re :

- dispiljadur a raont da serten rummoù elektourien (ar re a c'hounez ar muiañ), heb degass gwellaenn ebed d'an ekonomiezh (n'eus plañ adlañs ebed).

- ne lakaont «kenemglew sossial» ebed da sevel : biken ne assanto an ouvrierien, ar beisantered, labourerien ar burevioù, ar gelennerien, sammañ ar peb brasañ deus ar bec'h emma Barre o klask lakaad war o choug gant e blañ, pa weler pegen bras e chom an disingaldierioù sossial, na ra plañ Barre mann ebed ewid o c'hompesañ.

Diwar goust al labourerien eo emma ar gouarnamant o klask seveniñ e bolitikezh : en ur vro evel Breizh, lakaet da vezañ sujet evel ur c'holoni ; e vo gwashoc'h c'hoazh an droug graet gant ur politikerezh na sell nemed ouzh kement a zo mad ewid kreskiñ interestoù bras ar monopoloù. Dister e chom ar paeoù dre amañ ; kavoud labour e-barzh ar vro a zeu da vezañ ur sort burzhud ; eneb-demokratel a-grenn eo sistem an tailhoù : setu e rankfe pobl labourerien Vreizh paeañ ewid ar fezioù ha perzhioù gwan ar c'hapitalism gall ! Ober grev a ray labourerien Vreizh pa vint galwet d'henn ober gant o sindikadoù ; harpet e vo gante emsaverien UDB, ar strollad nemetañ hag a zo barreg da embann war-un-dro, e Breizh, penaos ez eus eus ar mac'homerezh kapitalist, penaos e vez distrujet ekonomiezh Vreizh, penaos e vez skrapet diganimp hon pinwidigezhioù naturel, penaos e vez krignet ar vro gant an arme, penaos e vez lakaet Breizh da vont da dachenn douristikel «de luxe», eneb-poblel. Goud a ouio labourerien Vreizh nac'h ober diouzh plañ Barre, ur plañ diazezet war ur politikerezh kilstourmer ha fall-pud war dachenn ar justiss-sossial.



Hag a newez e bro Vrest ?

AR RAPARIN-BAGOÙ

Ur wech ouzhpenn ez eo nec'het bras paotred ar raparin-bagoù. Goude bezañ labourer war o micher en-dro e-pad an hañv, emaint bremañ o klask gouzoud hag-eñ e vo padet da roiñ labour dezo. Kontrollet eo a-grenn lenn-vor Vrest gant pennoù bras an «amirauté» (amiraliezh). Setu perag ne ya porzh-kenwerzh Brest en-dro nemed goustadig goustadig, ha n'eo ket gwall nec'het gantañ paotred ar monopoloù kapitalist. Gwaskañ a ra ive an arme hag ar marin war ekonomiezh lenn-vor Vrest, ha daoust ma'z eo plasset mad porzh Brest ewid ar raparin-bagoù, ne raer ket gantañ pell ac'hano, ar pezh a c'hellfed ober.

Er mareoù-mañ e vez etre 200 ha 300 a labourerien eus an AFO en dilabour «partiel» beb sizhun. Emma war wel an dilabour rik, a-grenn, heb ma vefe torret ar c'hontrajoù koulskoude.

«Galwet» porzh Brest da vezañ un dra vuzhodus, daoust hag-eñ m'ema ket war-nes c'hwitañ war e «c'halwidigezh» ?


ERICSSON

Hanw zo e vefe prenet Ericsson gant ar stal amerikan Asclinter Otis, ispisialiset ewid ober pigneresioù. Diwar adframmidigezh an elektronik eo deuet an dra-se : usin Ericsson Brest n'eo ket graet ewid ober telefonoù elektronik, (hag a vo lakaet e plass an telefonoù mekanik) ; setu emma an Thomson CSF e sañj gwerzhañ usin Vrest. O c'hortos 1 800 plass-labour e oad : n'eus bet degasset nemed 900.

Start e lavar UDB penaos e c'heller sevel un usin elektronik e Brest, e-kichen an heni a zo ase dija, hag evel-se e vefe savet an 900 plass-labour bet prometet gant Pompidou pa voe bet lañset usin Ericsson.

TRANSOCEAN.

260 a dud lissafsiet ar bloaz-mañ : ar wech-mañ ez eo echu da vad, hag ez eo ur gwall daol ewid Brest. Diwar an 600 plass-labour a oa e Brest, e-barzh ar «gwiaderezh» (textile) n'eus ket gwall bell zo, ne chom mui nemed un 200 bennag.



Klasket Pobl Vreizh

Ar 7 a vis Here e Brest

AR SEVEL-TIER

Adlañset 'oa bet an traoù tamm-pe-damm, med emaint sac'het en-dro. Pa raer ar gont, mad, e weler penaos e chomo 10 % eus labourerien ar sevel-tier heb kavoud o labour en-dro. Gant ar plañ Barre, gant ar c'hredioù stanket, n'eus wellaenn ebed war wel : netra nemed koulmoudu...

Setu n'ema ket mad ar bed tamm ebed gant labourerien Vrest, tamm ebed gwelloc'h ewid gant re Vreizh a-bezh : dileset int gant ar re a zo e penn an traoù, hag a chom dinec'h kêr gant o c'hudennoù. N'eo ket hebken ne vez ket savet usinoù newez, med o vont da serriñ ar re a zo bet savet eo emmaer o vont d'ober. Gwelloc'h 'vez kavet sevel kasarnioù, ase martese e komprener gwelloc'h, rag, peurvuiañ, ne saver ket usinoù diwar ar c'hasarnioù.

Kellig Thomson CSF

Galwet gant o aoadurioù sindikal, CGT, CFDT ha FEN, 20 000 a dud, pe dost, zo bet en em vodet e Brest, d'ar yaou 7 a vis Here, ewid diskouez ez int a-eneb da blañ (steuñvenn) Barre. Graet o deus paotred ar sindikadoù beb a brezegenn o verkañ pehni vo efed plañ Barre war labourerien Vreizh. Goude-se ez eus bet graet ur pezh tro-vale dre ruioù kreis-kêr, beteg Plassenn al Liberté (Frankis.), dirag an Ti-Kêr.

Assambles gant ar c'hant mil a labourerien hag o deus manifestet dre Vreizh a-bezh, huchet o deus re Vrest, a vouezh uhel, penaos ez int a-eneb krenn d'ar galloud kapitalist ha kreisenour hag a wask warno di-baoues.

Y.B. Gwionvarc'h

KOMANANTIT DA b/ POBL VREIZH

Ar gelaouenn bolitikel nemeti e brezhoneg penn-da-benn
B.P. 304 — 29273 BREST CEDEX

Hanw hag hanw-badez

Chomlec'h

a gass e gomanant : Amañ an arc'hant :
boutin : 20 L (1) dre chekenn-bost (1)
Skoaz : 30 L pe ouzhpenn (1) dre vandat-lizher (1)
Estrenvro : 30 L (1) dre chekenn-vank (1)

C.C.P. RENNES 2746-79

(1) Diverkit ur gerioù na servijont ket

KOMANANTIT DA LE PEUPLE BRETON

E galleg flour penn-da-benn
B.P. 304 — 29273 BREST CEDEX

Hanw hag hanw-badez

Chomlec'h

A gass e gomanant : Amañ an arc'hant :
boutin : 20 L (1) dre chekenn-bost (1)
Skoaz : 30 L (1) dre vandat-lizher (1)
Estrenvro : 30 L (1) dre chekenn-vank (1)

C.C.P. RENNES 2365-76

(1) Diverkit ur gerioù na servijont ket

Taolomp ur sell ur wech c'hoazh
war afer Plogoneg, pe :

Plogonnec Circus

Bez zo merc'hodennou a vez
diskouezet 'barzh ar sirkoù, merc'hodennou a fiñv, a lamm, a red pa vez
sachet al lassennoù a lak aneho da vont
en-dro. Hag e reont pezh a garer.
Arabad troc'hañ al lassennoù avad.
Troc'het o buhez d'an dimeselled hag int
da gouezañ marw mik.

Soñjit bremañ 'barzh un teatr
merc'hodennou, gant tud ken gwir ha
bew ha n'eo ket forzh piw. Ar
verc'hodenn : ur mæer, e penn al
lassennoù, an depute. Setu pezh eo bet
sirk bras Plogoneg.

Daou vloaz zo e voe c'hoariet an akt
kentañ. Ur barres 2 500 den eo Plogon-
neg. Ul lodenn : labourerien-douar ; kalz
o labourad e Kemper pe Zouarnenes.
Rag n'eus ket bern labour e Plogoneg.
N'eus ket an disterañ usin : n'eus
tachenn ebet ewito ; gwelloc'h a gav an
ti-kêr prenañ douar war Menez Lokorn ;
ase emæer o sevel un dachenn douristi-
kel ('oa red prenañ, a lâr lod, mod-all vije
aet an douar gant ar «Boched» !).

Seul rouessoc'h an dud war-ar-
maes eo deuet niverussoc'h ar re a
labour e kêr. Lod zo deuet deus Kemper
memes da sevel tier e Plogoneg, rag
ker-ruz eo tro-dro kêr. «Div skol zo», zo
bet lâret deho. Ya, diw, med diw gristen,
an heni laik e St-Alc'houen, ur gêria-
denn hag a zo war gumun Plogoneg,
med 7 km diouzh ar vourc'h. Ha tud da
c'houlenn ur skol er vourc'h. «Po ket» a
voe respontet deho gant ar mæer. Ha ne
voe ket.

An eil akt, ar bloaz passeet.
Goulennet e voe ar skol en-dro. «Po
ket», a voe respontet c'hoazh gant ar
mæer. «Po ket» a respontas d'e dro
Guermeur, depute Douarnenes. E penn
ur strobard deputeed ha senatourien bet
savet da zifenn ar skolioù prevez emæ al
lapouss-all-mañ. Ezomm zo ur skol, a
soñjas Ensellerezh ar Skolioù. Hanwet e
voe ur vestres-skol. Dewezh kentañ ar
skol, hi deuet da gemer he flass, a voe
kasset da bourmen gant ar mæer.
Kavoud a reas ur plass e lec'h all. Ha ne
voe skol ebet c'hoazh.

An trede akt, ar bloaz-mañ. Savet
un oaled laik gant un toullad tud, e voe
goulennet ur wech c'hoazh kaoud ur
skol ewid 60 bugel benneg.

«Ur skol vo», a assantas Ensellerezh
ar Skolioù hag hanwet en-dro ur
mestr-skol all.

«Vo ket» a responte dalc'had ar
mæer. «Vo ket», a galede an depute ;
hag eñ da zekorñ ar mæer : medalenn ar
vewellien fur.

Beteg daou zewezh a-raog digor ar
skol eo chomet mud ar prefed : gwall
lemm o frioù da zeputeed zo ha
gwashoc'h c'hoazh o c'hrabanou.

Dewezh ar skol e voe ul loch koad
doare an termajed war dachenn fobal
Plogoneg : ur c'hraoù dibrestr gant
un doenn doull ewid bugale o leñvañ d'o
mammoù. Sirk zo bet beteg ar fin.

Graet zo bet van da zemissioniñ,
med re goustant eo ar c'hoariet. Ewid
ar votadeg a zeu, ne vo ket votet ewid an
tu dehou pe an tu kleiz. Votet 'vo ewid
ar skol laik pe ar skol libr. Ha lakaet
«Skol an Diaoul» da vezañ kaos da
gargouñ newez ar gumun, e vo aessoc'h
lakaad an dud da votiñ med. Gant
mouezhioù Plogoneg e vo hanwet
Guermeur ur wech c'hoazh. Martese ne
vo ket daw, ar wech-se, kass kusulierien
da glask o mouezhioù digant ar re gozh
war o zremenvan.

Lan Kerneven

Marw eo Menez C'hamm

Piw e-mesk lennerien Pobl Vreizh
n'en-neus ket klewet hanw Menez
C'hamm ? An 'oaled sewenadurel
digoret en 1970 en ur maner dizro etre
Speied ha Gourin en-noa graet brud
buan. Serret eo bet ar mis tremenet.

Perag ? Peogwir, hervez Per
Lemoine, merour an oaled, ne vese ket
sikouret kalz gant an departamantou
brag ar parrosioù tro-war-dro, ha tamm
ebet gant an Aferioù Kulturel hag ar
Yaouankis ha Sportoù. Rag ma vese
feurmet ar maner ewid ur bennozh
Doue, koulz lared, e oa labourus ober
war-dro an oaled, ha re goustus...

Meur a heni bet 'barzh Menez
C'hamm en-no keñf moarvad d'an
abadennou nos ma vese leun ar sal
bras ha ma tae tud yaouank (ha re
gozh) ar vro da selaou Youenn
Gwernig ewid ar wech kentañ, pe
ganerien eus Euskadi, Okitania hag
all... Hag ar re a gustume dont di
d'ober stajoù ha bodadegoù a gavo
dies sur-mad diouveroud ul lec'h
mod-se, e-kreis ar vro vrezhoneg...

Med disteraet 'oa Menez C'hamm
abaoe un eurtad, ha tud eus an diavaes
a vese eno dreist-oll. Setu, mar gall an
den kaoud keñf d'ar pezh eo bet
Menez C'hamm, ha rebech d'an
dud-e-karg boud chomet diseblant
outañ, n'eo ket dleet d'ar journalisted
dismantrañ paper da skrivañ emæ
kultur Breizh o fallaad ha prest da
fatiñ adarre ! Pas ewid an dra-se !

Rag ar c'hontrol an heni eo amañ
ba kreis Breizh ! Yann Goasdoue ha
Yannig Baron o-deus hadet traoù a zo
kellidet ha diwanet bremañ ! Daoust
ha n'eo ket emsavoc'h ewid 'kultur
Breizh' gweled mil den o tont da weled
ar Bonedou Ruz 'barzh Karaes ha
kemend-all da arvestiñ ouzh tresaden-

Ar gwaskerezh war laboueresed Ploveilh

Distroet eo d'o labour merc'hed ar
SCAPLEN, goude 103 dewezh grev.
A-benn ar fin ez int deuet a-benn da
gaoud un dra bennag deus ar pezh a
c'houlennet. Kerkent, a-boan ma
oant kroget gant o labour en-dro,
eo en em lakaet renerien an usin, an
Ao. Ao. Signeyrole ha Beziade, da
glask afer ouzh ar re a oa bet e
grev : chañch plass dezo zo bet
graet, ober mezh dezo, ha memes
lakaad unan anezo er maes zo bet
graet. Evel-just, muioc'h 'vez klasket
afer ouzh ar re a zo bet o kass ar
grev war-raog. Pessort kentel a
c'heller tennañ deus ur sort grev ?
Chom a ra ar c'hapitlism ken kriz,
ken rust, ha ken fall ataw. Arabad
huñvreal e «société Giscard». N'eus
kén nemed ur pal : labourad muioc'h
mui ewid sevel ar sindikad lec'h
n'eus ket anezañ, ha sevel un tamm
peb lec'h iwe kevrennoù UDB,
strollad micherourien Vreizh.

L. Klec'h

noù Nono en MJC, ewid ur sal
leun-kouch ba Menez-C'hamm ? Ha
sonerien yaouank Rostrenen o tifenn
ar gwir festoù-nos, ha re yaouank ar
C'hastell-Newez o sachañ milieroù a
dud da selaou sonerezh Iwerzhon, ha
Servat pedet gant Amicale Laique
Karaes, ha c'hoariva brezhoneg da
vezañ ba'r MJC, ha n'ñ ket ped gouel
ha ped abadenn c'hoazh...

Nann, al lapouss en-neus kuitaet e
neizh, ha kultur Breizh zo deut
bremañ war al leurgêr.

AL LIAMM

ar gelaouenn nemeti o roñf, 6 gwech ar bloaz,
barzhonegoù, kontadennoù, pennadoù a beb sort ha koleier
80 pajenn e peb niverenn - Renner : Ronan Huon
KOMANANT : 35 L - Studierien : 25 L
Tefzorer-merour : P. Le Bihan - 16, rue des Fours-à-Chaux
St-Servan 35000 St-Malo - CCP 5349-06 Paris

FOTOIOÙ

eureujoù, bruderezh
kartennoù «piw oc'h ?»
poitrojoù bugale

e ti Joël POIRIER Breizh photo
21, Bali Clemenceau - BREST 29200
Pelleg. 44.42.91.

SIMINALIOÙ R. BRISACH

Greunvaen ha mein all
An Oriant : 72, Str. M^{al} Foch - 64.58.80.
St-Maloù : Kreisenn Kenwerzh Bellevue - 56.60.89.
Kemper : 17 ter, Str. Uhel Lokmaria - 95.26.18.
Skrivet (e brezhoneg), ma vo kasset deoc'h
titouroù ewid netra

Kuit da gaoud riw er goañv-mañ, galwit heb dale

Eujen KEMENER

e Tre-Laouenan (etre Kastell-Paol ha Landi) - pellg. 69.98.98.
pe e Brest (Str. Villeneuve) - pellg. 02.02.60.

Fuel a vezo degasset deoc'h kerkent, lakaet ho tommeres-kreis e doare
ha riñset ar siminal

Arabad mogediñ hor bro, na dispign arc'hant dre ziewezh



Justiss ar re binwidig

Brudet eo Breizh dre ma'z eo ur vro 'galwet' da vezañ un dachenn heb he far ewid an douristed hag ewid an arme. Brudet eo ewid un dra all c'hoazh -a vez ankouet a-wechoù : dre amañ e vez wall rust ar justiss, kilstourmer en ur ger... Dalc'homp soñj eus afer ar barner Pascal, a oa bet treuskasset dirag les-varn Roazon ; dalc'homp soñj eus ar prosoesou sindikalisted ha peisanter, bet n'eus ket pell zo e Liger-Atlantel hag e Penn-ar-Bed.

E Penn-ar-Bed, ur wech c'hoazh, ez eus bet douget, newez zo, ur varnedigezh klass, hag a zo bet splann.

Piw 'oa an tamallad ? Pobl Vreizh, dindan spesoù Pler Calvary, dewezhour war-ar-maes, un den kaezh gwasket gant ar viser, ha serret warnehoñ e-unan. Petra 'vez tamallet dehoñ ? Bezañ lakaet an tan, diw wech, e-barzh (feurm e ameseg). Pa seller a-dostoc'h, e weler penaos n'eo ar (feurm)-se, a-benn ar fin, nemed ur c'hozh ti didud, ur c'hrañj. Ya, lakaet eo bet an tan enni, diw wech, gant Pler Calvary. Perag ? Ne vern. Graet en deus gaou ouzh ar gwir-perc'henniezh prevez ! Dañjerus-tre eo kement-se.

Pler Calvary : un den eus hon pobl, ifamet e fass, evel heni hon pobl... Paour ha di-zesk e oa e dud ; diaes eo bet sevel ar paotr-se, rag tro-dro dehoñ e oa gwall sorseresed : an alkoolegezh, an digenvez, handikap ar spered. Diwar se e savo kisidigezh, argaderezh, kompleksoù-diouvenit ; sed ase emzistaolioù a gaver e-barzh kenbersonelezh ar Vretoned hiziv an deiz...

N'eo Pler Calvary ewid aotrounez ar justiss, nemed ur mewel a-ziwar-maes tangwall, setu e vo rust ar c'hastiz. 7 bloaz prison, krenn. Ha ped ewid Rives-Henry, A. Barrière pe «Château-Chlrae» ? «Skoulmadoù skañvaüs» (circonstances atténuantes) d'ar re-mañ, med, ewid ar re baour, truez ebed !

Bez ez eo ar justiss ur justiss klass e Breizh, peogwir emañ an alkoolegezh, ar viser, ar warlerc'hiadur-spered, an drougoberezh oc'h ambroug ar re baour eus o c'havell d'ar vered. Sed ase korriganesed ar Vretoned. Sed ase frouezh trenk ha c'hwerw deuet diwar ar gwaskerezh ekonomikel ha kulturel. Diwarno e teuer d'en em flastrañ an unan, d'en em zinac'h, d'en em zistruj. Deuet eo a-benn gouarnamantoù kapitalist ha kreisenour ar Frañs da lakaad ar Vretoned d'en em vougañ o-unan. Deuet int a-benn, pe dost. Med justiss a vo trec'h un deiz !

M.T. Laot

NOTENNOÙ

kilstourmer : réactionnaire ; ar gwir perc'henniezh prevez : le droit de propriété privée ; ifamet : abîmé ; digenvez : solitude ; kisidigezh : susceptibilité ; argaderezh : agressivité ; kompleksoù-diouvenit : complexes de frustration ; emzistaolioù : réactions ; kenbersonelezh : personnalité collective ; tangwall : incendiaire ; krenn ferme (prison) ; ar warlerc'hiadur-spered : l'arriération mentale ; drougoberezh : délinquant ; korriganesed : fées.

D'HON LENNERION

Fonnus eo danvez an niverenn-mañ eus POBL-VREIZH ! N'omp ket deuet a-benn da gavout ar plass a oa red da embann listenn harperion POBL-VREIZH ar mis-mañ, na da embann kennebeud al lizheroù bet kaset deomp... Hag e skriver deomp ken a-lles koulskoude ez eo plijus POBL VREIZH ken an danvez anezi, ken he brezhoneg ! Aes eo d'an oll kompren e ra kement-se plijadur da skipailh POBL VREIZH. Pedñ a raomp eta hon lennerion d'hon digareziñ mar ne gavont ket en niverenn-mañ kement ha ma oant o c'hortos. A-benn ar mis a zeu e vo roet un digoll dezo. Trugarez vras da lennerion ha da harperion POBL VREIZH !

ROSTRENEN : an urzh o ren e Kampostal !

Daou baotr yaouank, Mark ha Kristian, ha tad unan anehe zo bet dihanet da zebriñ boued abaoe penn-kentañ mis Here : 'grèv an naon' a raent dirag skolañ Kampostal Rostrenen.

Petra zo kaos ne oant ket bet degemeret bar skol ar bloaz-mañ, peogwir o-doa skrivet gant kamaraded un tamm kasetenn fentus ha n'eo ket bet plijet kàer da rener newez ar skolañ ! Med naw e oant oc'h ober ar journal ; ar re all n'int ket bet trubuilhet nag ar gelennerion a rae war-dro... Daoust ha n'eo ket abalamour e oa o zud peisanter vihan, ha ruz ouzhpenn, eo bet skarzhet an daou yaouank ?

Nac'h debrñ boued o deus graet, gourvezet 'barzh un deltenn fass d'ar skol. Manifestadegoù zo bet, ha Rostrenen, ha Kintin, ha ba St-Brieg goude, da essaeañ lakaad ar rener Gauthier da blegañ, rag heñ e-hun

en-neus diviset bountañ anehe e-maes. Sikouret e vezont gant CFDT ar Skolioù Prevez, ar Beisanted-Labouren, skolidi St-Brieg hag a beb sort mignoned bodet e-barzh ur c'homite-skoazell. Harp UDB kreis Breizh o-deus iwe, rag deus un tu emañ ar re a c'houll ar justiss hag ar frankis da soñjal ha da skrivañ (heb m'hon defe-ni fizia mant 'barzh ar skolioù prevez evel m'emañ), ha deus un tu all... rener ar skolañ, ar mestr nemetañ, a-berzh Doue moarvad, aliet mad gant pennoù bras kusul ar skol (bourc'hisien, medissined deus St-Brieg...), harpet gant ar prefed... hag an eskob... ha gant tud n'int ket toud ken ha ken santel : pa oa klasket sevel ur c'homite-skoazell ba Karaes, tud ar SAC an heni oa deut da harzañ an dud, e-skued difenn an urzh vad... urzh ar re wenn evel-just.

Skolaer ar Gilli

**LEVRIOÙ
BREZHONEG
TI GIRAUDON**
30, strada Keranpont
22300 LANNUON
Pg. 35 04 90



Pennad-kaos gant Herve ha Paol eus An Triskell

Klitchad Pobl Vreizh



PV — Petra 'newez gant an Triskell ?

PAOL — Ur bladenn newez o tont er-maes, savet gant *Chant du Monde*.

PV — Perag hoc'h eus dibabet an ti *Chant du Monde* ?

HERVE — Div bladenn hon oa savet e ti *Philipps*, hag un trede en un ti eus Breizh, *Vellia*. Aet omp da di *Chant du Monde*, peogwir eno, en tu all d'an doare da sevel ar pladennoù, ez eus un dra a-boues ganto : an «ingaladur» (distribution). Heni ti *Vellia* ne oa ket bras a-walc'h.

PV — Petra 'zo da glewed war ar bladenn newez ?

PAOL — Soñjet hon oa, Herve ha me, penaos e oa red mont pelloc'h, ha kenaosañ tonioù ha kanaouennoù e brezhoneg penn-da-benn.

PV — Ha war-lerc'h ? Pladennoù all ?

HERVE — Ya. Sevel a rimp assambles unan newez, o vont e-barzh ar rummad «special instrumental», ur bladenn gouestlet d'an delenn geltieg.

PV — Pelec'h hoc'h eus desket telennañ ?

HERVE — Hon-unan hon eus des-

ket, med diwar selaou Alan Stivell. N'eus netra reizh e-barzh kelennadur ar Skol Sonerezh diwar-benn an delenn geltieg ; ne dalv ar c'helennadur-se nemed ewid an delenn glassel ; ha n'eo tamm ebed heñvel homañ ouzh an delenn geltieg ; disheñvel an teknik, disheñvel ar spered dreist-oll. C'hoant ra raomp gant kalon hon pobl ; er Skol Sonerezh, ne zesker nemed evel un emfihver (automate). 'Gis ma lavar va zad : «Ar re a zo bet er Skol-Veur Sonerezh a gac'h war sonerezh ar pobl».

PV — Perag e kanit e brezhoneg ?

HERVE — Aes eo da respont. Red eo da yezh Vreizh chom bew, evel e tie chom bew, hag en o sav labourerien Vreizh. Deskiñ brezhoneg hon eus graet, hag e talc'himp gant ar striv bet graet en hon raog gant *Ar Gabalerien*, Glenmor hag Alan Stivell. Implijet e vez ar brezhoneg evel ur benveg-stourm ; un dra newez, un dra a-boues eo kement-se er vro-mañ. A-drugarez d'al labour bet boulc'het gant an UDB dreist-oll (ur gasetenn vrezhoneg he deus, pegan 'ra skritelloù brezhoneg, brezhoneg 'vez ganti e-kerz he meetingoù), eo deuet ar brezhoneg da vezañ un arouez, heni an adsav sewenadurel, hag evel-just, politikel. Ur labour dispac'her eo, a gav din, kanañ e brezhoneg ewid pobl vrezhoneg ar vro-mañ. Setu ar roll hon eus dibabet, gant strollad *An Triskell*.

Ur sell war ur staj brezhoneg

Kerbernes, Pleuveilh : ur skol labour-douar e-kichen Kemper. Ur staj brezhoneg oa eno, pemzgetez kentañ mis Eost. Stajoù brezhoneg all a vez bremañ kalzig da beb vakañsoù. Gant B.Y.V. (*Brezhoneg Yezh Vev*) e vez savet lod, gant *Ar Falz* e vez unan bennag all, *Kamp Etrekeltieg ar Vrezhonegerien* a vez graet eus un all ; gant *Skol an Emsav* 'oa savet hemañ.

Tennañ a ra sort staj d'ur skol da gentañ. Klassoù zo, gant taolioù skol, un deolenn zu, kelennerien ha... kentelioù evel-just. An dra-se a vez bemdez diouzh ar mintin ha deus 5 eur da 7 eur nos. Renket e vez an dud hervez ar pezh a c'housont a vrezhoneg. 80 den zo deuet, un hanter bennag anezho, gwall varc c'hoazh o brezhoneg, med n'eus gour ebed na oar netra.

Goude merenn e vez da grediñ e vez aet kalz d'ar skol-louarn. Rouez an dud war porzh ar skol : unan bennag zo chomet d'ober fotoioù, un nebeud reoù all zo 'sevel ur montaj bannoù tresset ; klevoud e raer pelloc'h e-touesk ar gwez ar re zo 'teskiñ kan-ha-diskan. Ar re all zo aet hebioù d'ober enklaskoù war ar plant dre ar parkeier tro-br-dro, da weled petra eo ewid an dud abadennoù brezhoneg ar radio hag an T.V., d'ober un interview ewid ar gasetenn «Evid ar Brezhoneg».

Diouzh an nos e vo un abadenn bennag en M.J.C. Pleuveilh, digor d'an oll evel-just. Ar galleg a vo trec'h amañ, ewid ma c'hellfe peb heni lâred e soñj. Rag un digarez eo heveleb abadennoù, hag un digarez mad da lakaad an dud da roiñ o soñj, un digarez eo iwe da ziskouez pegen stag eo peb techenn deus buhez hor pobl, koulz ar c'hultur hag an ekonomiezh. Gwelet zo bet e-gis-se ur montaj

war ar Vro-Vigoudenn, unan all war diskar ekonomiezh kreis-Breizh, reoù all gant Felix ar Garreg, filmoù gant «Torr E Benn» hag all, hag all...

PERAG EMAOC'H O TESKIÑ BREZHONEG ?

Aet omp da c'houlenn gant ar re oa er staj da betra oant deuet da zeskiñ brezhoneg. Diaes 'oa da galz respont :


- N'eo ket aes da lâred.
- Peogwir en em santan Breizhad, setu toud ; n'eus ket emm (ezomm) kaoud un abeg.
- Yezh pobl Vreizh eo.
- Ma vefen en Alamagn e teskfenn an alamaneg.
- Me gred din ha pa 'peus gwelet sklaer oc'h Breton e teu c'hoant deoc'h deskiñ brezhoneg. Pa garit un dra bennag, n'ousont ket ma vefec'h gouest da zisplegañ da vad perag. Memes-tra eo.

A-wechoù e vez eeun ar respont :

- Du-mañ 'vez kaoseet.
- Dre ma micher 'mo martese da gaoseal brezhoneg.
- N'eo ket bet desket din pa oan bihan.
- Mezh 'm eus kaoud un tad a Vro-Leon hag a gomz mad-tre brezhoneg, ha me n'ousont ket komz.

Lod zo deuet d'ar brezhoneg en estrenvro :

- Me 'oa o chom pell eus Breizh, e Grenoble ; sed 'm boa c'hoant deskiñ brezhoneg.
- C'hoant 'moa da gaoud en-dro un



Klitchad Pobl Vreizh

AR FALZ

kelaouenn drimisieg an Emsav diasezet gant Yann Sohier, bodet enhañ skolaerien ha kelennerien Vreizh a-du gant ur skol vrezheg ha laik gwirion
Lennit Ar Falz ! Komanantit d'Ar Falz !

(30 L ewid 6 niv.).

AR FALZ, Str. Kan-ar-Gwez — 29245 PLOURIN-MONTRouLES
KRP 430-20 H ROAZON

Paperenn ewid goulenn mont e-barzh



Hanw hag hanw-badez

Chomlec'h

Goulenn a ran moned e-barzh
Unvaniezh Demokratel Breizh

D'an (d'ar) 19.....

Da gass en-dro

(troc'het pe adskrivet) da

UDB B.P. 304
29273 BREST CEDEX

Sin :

MARCHAIS E BREIZH

Klic'hed Pobl Vreizh



Achiu eo e dro Breizh ged J. Marchais, sekretour meur ar PCF. E dro Breizh, n'eo ket gwir penn-da-benn, rag n'en deus ket lakaet e dreid e-barzh departamant Naoned. Un dra a-boues eo neoazh ewid ar Vretoned e tahe sekretour meur unan a strolladoù gall an tu kleiz da weled e pessort stad ema ekonomiezh ha kultur o bro...

E Konk-Kernew en deus Y. Rouger, esel a Vurew Politikel UDB, e karg ag an aferioù diavaes, goulennet diged Marchais hag-efi e oa bet ur c'hañchamant ba'r PCF a-c'houde 1932, pa skrive D. Renault ar L'Humanité : N'eus ket da vout en arvar : ur bobl ged he ferzhioù dehi hec'h-unan eo pobl ar Vretoned'. Respontet en deus Marchais penaos e oa bet kement-se ur fari a-berzh l'Hum... Mes komzet en deus a-zivoud Unvaniezh Demokratel Breizh, dirag oll an dud tolpet e Konk-Kernew ha n'en deus laret droug erbed anehi, e kontrol ! Laret en deus, da skwer, e c'hellhe : UDB kaoud un nebeud plassoù ar listennoù re an tu kleiz, ewid ar mouezhiadegoù ti-kêr da zoned. Lennerion Pobl Vreizh bihan eo siwazh ! hon kasetenn vrezhoneg, ha n'hellomp ket moullif kement hag a garhemp ; mad, neuse, prenit Le Peuple Breton (heni mis Du, niv. 156) ; ase e kavahet, lakaet dre skrid, an enrolladur en e bezh, a gomzoù Marchais e Konk-Kernew, a-zivoud UDB.

A guñt Breizh, ag ar brezhoneg dreist-oll, o deus komzet iwe paotred ar PCF, mes, a-c'houde m'o deus savet o danvez lesenn a-zivoud kelenn ar brezhoneg, n'eus netra newez gete.

Ne spir ket kement-se doc'h doberioù ar Vretoned. Mall eo d'ar PCF ansavif en-dro, 'vel e 1932, penaos eh eus a bobl ar Vretoned, hag o deus ar pobloù an droed d'em ren o unan.

NOTENNOÙ

achiu : echu ; ged, gate : gant, gante(-to) ; neoazh : koulskoude ; e tahe : e teufe ; ag, a : eus ; esel : membre ; diged : digant ; a-c'houde : abaoe ; ar : war ; da vout, boud : da vezañ, bezañ ; fari : fasi ; a-zivoud : diwar-benn ; tolpet : bodet ; erbed : ebed ; e c'hellhe : e c'hellfe ; mouezhiadeg : éloc tion ; a garhemp : a garfemp ; e kavahet : e kaviet, e kavot, e kavoc'h ; ne spir ket kement-se doc'h doberioù ar V. : n'eo ket tro-walc'h kement-se, e-keñver ezommoù ar V.



Klic'hed Pobl Vreizh

harw, e Bro-C'hall, peogwir n'emaon ket o chom e Breizh. Med ma soñj zo dont en-dro da Vreizh heb dale.

Bretoned a Vro-C'hall, deus Breizh-Uhel zo deuet iwe :

- Dre zegouez on deuet da zeskif brezhoneg. Ur paotr en noa kenniget din mont da heuliañ kentelioù e Sant-Malo. Ha bet on bet evel-se. Kendalc'het 'm eus, peogwir 'm boa kavet an dra-se plijus hag 'm boa disoloet kudannoù pobl Vreizh. Goude-se on deuet da vezañ muloc'h emskianteg war dachenn an ekonomiezh hag ar sewenadurezh.

Heniennou deuet d'ar staj ne oant ket Bretoned dre o familhoù :

- C'hoant 'm eus da wriaziennañ er vro. Ar c'hammed kentañ eo deskiñ brezhoneg ewid anavezout mad ar bobl.

- N'on ket ganet e Breizh ha ma zud n'int ket Bretoned, med me zo deuet da chom da Vreizh ha me 'soñj din eo red deskiñ brezhoneg ewid komz gant an dud. N'eus ket da gomz galleg gante, peogwir n'eo ket o yezh. N'eus ket tu da gompren mad o menozioù pa gomzont e galleg ; hag un dra all zo : ar brezhoneg zo o verwel.

PV - Ar c'hoefoù iwe.

- N'eo ket memestra. Ar brezhoneg zo ul lodenn eus un dra dre vras : ar c'hultur. Ar c'hoefoù bremañ zo un dra ewid an douristed. Implijet 'vez c'hoazh ar brezhoneg ewid divisoud. Ar c'hoefoù ne vezont gwelet gant ar merc'hed yaouank nemed ewid an douristed. Pouesusoc'h eo ar yezh dre ma dalvez da zisplegañ menozioù. Ne zispleger ket e venozioù memes mod e brezhoneg hag e galleg. Ha disheñvel 'vo da zoare da weled an traoù e brezhoneg hag e galleg.

- Personelezh ur bobl eo.

Ewid kalz ema stag ar brezhoneg ouzh ur bern traoù all :

- Ewid gwellaad ma yezh on deuet peogwir eo yezh ma fobl. Hag ewid ma chomfe bew Breizh, eo red deskiñ ar yezh med n'eus ket nemed ar yezh. Med ar yezh eo an dra gentañ ev 'I ma chomfe bew ar vro. Bez zo iwe an eko. jomiez, buhez an dud.

PV - Ha c'hw'i 'soñj deoc'h ha ma varv ar brezhoneg eo vo marv pobl Vreizh ?

- Bez e vo tud c'hoazh evel-just, med war hir amzer, ma varv ar yezh, e varvo iwe an traoù all. Ne vo mui nemed ur yezh war an douar ; e-gis-se an uniformissionad 'vo graet etre toud an dud.

- Ewidon e Breizh n'eus amzer da zont ebed heb ar yezh. Staget eo peb tra.

- Diwar meur a abeg on kroget da zeskif ar yezh. Abegoù sentimental da gentañ : Breton on. Gweled a ran a-hend-all ur bern tud o komz brezhoneg tro-àr-dro din ; diaes a gavan nom pas goùd. An trede abeg eo e fell din difenn kultur hor pobl : un abeg politikel eta.

- Un akt politikel eo da gentañ deskiñ brezhoneg. Me 'gred din ha bremañ eo red kêr d'un emsaver goùd komz brezhoneg. Ur benveg ewid an dispac'h eo ar brezhoneg, dre ma eo ur yezh proletar.

- Ur stourm politikel eo.

- P'emaoc'h 'barzh an UDB, e rankit goùd brezhoneg, mod all oc'h ur rigolo. Ar brezhoneg e rank bezañ da yezh pa out un emsaver sossialist dre ma eo bet distrujet ar yezh-se gant ar c'hospitalism.

- Deskiñ a ran brezhoneg da gentañ dre ma eo ma soñj dont en-dro da chom da Vreizh ; sed e soñj din ema din da vezañ kad da gomz brezhoneg. Med traoù all zo kaos iwe, ha donoc'h c'hoazh. Bet on bet ouzhpenn 20 vloaz pell eus ar gêr, en Aljeria. Gwelet 'm eus ur vro o c'houid he frankis ha talvoudegezh he yezh er stourm. En ur zont en-dro amañ 'm eus gwelet e oa ar memes fenomen o c'hoarvezoud. Kredet 'm eus divinoud ha ma oan bet ken dedennet gant dispac'h Aljeria eo martese iwe dre 'm moa un dra bennag a sort-se da vevañ e Breizh. Sed e klaskan deskiñ brezhoneg.

PERAG E VEZ GRAET SORT STAJOÙ ?

Goulennet hon eus iwe o soñj digant ar re a rae war-dro ar staj, ar gelennerien en ur foud, daoust ma ne vez ket a-lies o micher gwirion.

- Graet e vez sort kampoù peogwir e vez tud o tont da heuliañ anehe evel-just. Bez' eus tud a fell dehe peurzeskif brezhoneg, pe deskiñ lenn ha skrivañ ar brezhoneg a anavezont pe tud a fell dehe deskiñ brezhoneg da vad.

- Da gentañ ewid deskiñ brezhoneg eo sort stajoù evel-just, med iwe ewid lakaad an dud da zisloañ ar vro war beb tachenn, kenkoulz war an dachenn ekonomikel ha toud, ewid gweled ar stourmoù zo er vro, penaos vev an dud ba'r vro.

PV - Med koulskoude eo kloset a-walc'h warnañ e-unan ar staj-mañ. Ar peb brassañ deus an amzer 'vez an dud 'barzh ar skol. Ha n'eo ket un doare 'ghetto' war-ar-maes pa zo tro-àr-dro kêrioù brezhonekoc'h c'hoazh eged ar c'hamp zo amañ ?

- Me 'gred n'hell ket an dud a ya kuit deus netra mont diouzhtu da zeskif brezhoneg war ar-maes dre ma eo re aes d'an dud mont e galleg gante hag ouzhpenn-se n'int ket gelennerien. N'eo ket possibl tapoud brezhoneg nemed an un dro krefiv a-walc'h, ar pezh a c'heller kavoud er stajoù, nemed e ve krefiv a-walc'h ar brezhoneg en den e-unan ewid ma c'hellfe mont nemed e brezhoneg evel-se gant tud all war-ar-maes ; ul live bennag a vrezhoneg e ranker da gaoud ha n'heller kaoud nemed en endro ur skol pe ur staj e-gis-se.

- Int a zegasse galleg 'barzh ar c'hêrioù, ar c'hontrol 'vefe. Un hanter deus ar staj n'eo ket gouest c'hoazh da gaoseal. Kalz deus ar re all, ac'hann da gompren brezhoneg ar vro 'vo diaes dehe. Med a-lies a-walc'h, ez aomp gant strolladoù tri pe bewar, unan pe zaoù gouest da gaoseal mad tre gant tud ar vro, hag ar re all a selaou. Darempredoù hon eus bet gant an dud gant ar 'krall' da skwer ; kaset eo bet an dud da c'houlenn traoù ewid disoloañ ar vro C'hlasig (Bro Gemper). Mod all 'barzh an ostalerioù 'vez komzet deus traoù e bed sort iwe. An dud e c'houlenn etew dam 'betra emsomp o teskiñ brezhoneg.

- Bez zo ur bern tud o devez plijadur gweled ar re yaouank o'n em lakaad en-dro gant ar brezhoneg.

PETRA VEZ GRAET C'HOAZH GANT SKOLAN EMSAV ?

- Ar c'hampoù zo un darn bouesus eus labour S.A.E., peogwir eo ul lodenn eus ul labour olleg, skoazellañ ar re a fell dehe adperc'hennañ o yezh. Ha, war un dro, kompren gwelloc'h petra eo stad pobl Vreizh ha pessort kudennou eo e re. A-hend-all e vez labour a-hed ar bloaz evel-just, peogwir ez eus un toullad kreizennoù strewet dre Vreizh a-bezh ha labour a vez graet a-hed ar bloaz gant ar c'hreisennou-se.

Kampoù all a vez graet. Ar c'hampoù war-ar-maes zo ewidomp kampoù pouesut, peogwir ase e vez lakaet tud a zo o teskiñ brezhoneg da zarempredif ar Vretoned a gomz o yezh bemdez c'hoazh war o labour e-barzh ar feurm. Ase e c'hell bezañ da gentañ da c'houid e-keñver yezh hag iwe kaoud eskemmoù e-keñver buhez pemdez pobl Vreizh hag iwe diskouez ez eus tud yaouank a fell dehe chom da vevañ en o bro.

PV - Beteg-henn, an dra-se a ra kalz a studi ; mod all 'vez graet petra gant Skol an Emsav ?

- Bez'eus ar stourm da gentañ ewid kultur ha yezh pobl Vreizh, peogwir bremañ ema o vont da get buanoc'h-buanañ yezh pobl Vreizh ha sur a-walc'h he c'hultur war un dro. Setu perag e vez aaset manifestadegoù gant strolladoù all e-gis Ar Falz, B.Y.V., Bleun-Brug, Emgleo Breiz, Kendalc'h, hag all... ewid diskouez n'omp ket prest da lesel hon yezh hag hor c'hultur da vont da get hag ewid stourm iwe eneb ar galloud e galleg peurziskar pobl Vreizh hag he sewenadur.

Embann a ra Skol an Emsav e lec'h all ewid petra ema-hi o stourm :

«Ni 'fell deomp eh adsavfe hor pobl. Adsevel pobl Vreizh a dall ewidomp diskar ar c'hospitalism ha sevel en hor bro ha gant pobloù all ar bed ar sossialism a roy an tu da beb heni da vout mestr war e vuhez ha da beb pobl d'en em ren hec'h-unan.

Yezh pobl Vreizh eo ar brezhoneg, yezh ar bobl (daoust ma eo ar galleg yezh ul lodenn iwe). E varfe ar brezhoneg e ve arallekaotoc'h c'hoazh labourerien hor bro hag aessoc'h aber gounid diwar o c'houst. Sed e soñj deomp eo ar brezhoneg ur benveg red da vont eneb hon distruj, da nac'h ha da ziskar ar sistem hon gwask ha da sevel pobl Vreizh en he frankis.

Pennad savet ewid Pobl Vreizh gant Lukian Kergoat, diwar interviewoù graet e-pad staj brezhoneg Skol an Emsav e Pleuveilh. Lakaet eo bet an traoù e-gis m'int deuet gant an dud. Setu perag e vez a-wechoù digempenn troc'hoù-kaos zo, pe welloc'hig brezhoneg an eil ewid heni egile. Troet eo bet e galleg ar pezh a zo bet lâret e brezhoneg.

Ha bremañ?

Marw eo, p'he deus strinket etre e zaouarn ar vombezenn a oa gantañ. Marw ewid netra, he deus disklêriet UDB kerkent. Hag ez eo gwir, es politikel. Rust ha digalon eo bet kavet gant lod barnadenn UDB... Abaoe pell zo e tiskleir UDB, dibaoues, penaos n'eus ket plass, e Breizh, hiziv an deiz, ewid doareoù feulz an FLB ; n'eus netra da c'hortos, ewid mad ar Vretoned, eus ar gwall-nerzh, bremañ. Er c'hontrel.

Forz pegen a-du e c'hell bezañ UDB gant dielfennadurioù a lak anad penaos ema ekonomiezh ha kultur Breizh en ur stad arvarus, penaos ema ar vro dre harz mont da dachenn douristikel ewid ar re binwidig ha da dachenn miret ewid an arme, penaos ema Breizh o koll he gwad bew gant he bugale red dezo mont pell diouti da glask labour, ne c'hell ket UDB, bremañ, sevel a-du gant ar stourm armet. Re arallekaet eo pobl Vreizh, ha ne raio (ne ra dija) nemed sevel a-eneb d'ur stourm sort-se, ha pa c'hoarvez ur gwall-zarvoud evel marw trumm ar paotr yaouank-hont, ne sant ket pobl Vreizh penaos e sell sort degouezioù outi.

Setu e tle ur varnadenn bolitikel bezañ didruez ha krenn : bez e tleomp ober bugeliezh politikel eus ar pezh a zo bugeliezh politikel. N'hon eus ket d'ober plijadur d'an « emsav » na deomp-ni hon unan kennebeud. Mad pobl Vreizh eo a glaskomp, ha n'eo ket he gwall. Ha diwar doareoù an FLB n'eus nemed gwalleurioù war wel : marw Yann-Kel Kernalegen zo unan anezo. Hag ez eus ur riskl all : gweled tud zo o pignad, o pignad dalc'hmad, trema pessort pal, en ur ober gant pessort doareoù ? Trema ur pal gwall vrumenneg, gant doareoù danjerussoc'h-danfjerussafi. En em zisober diouzh ar skiant politikel n'hellomp ket, na diouzh ar skiant vad.

War an dachenn denel avad, n'eo ket paotred ha merc'hed UDB tud digalon. Forzh pegen difur eo bet kavet gant UDB doareoù an FLB, o kass d'ar marw, ha d'ur marw ken diefedus, un den yaouank leun a vuhez, e sav truez ennomp ouzh an heni tremenet, ouzh e familh rannet gant ar glac'har, ouzh e vignoned hag e geneiled gwall drubuilhet... Garw e vez kavet an Ankou pa falc'h e-mesk ar yaouankisoù. Truez, ya,

ouzh an heni a zo bet kasset da Anaon ken prim gant ur blanedenn digar. E interamant Yann-Kel e oa tud eus UDB, dre ma oa ur mignon dezo. N'eo ket dre bilboussezezh e oant e Kerfeunteun.

Med arabad roth korf d'ar meskaj politikel. Kirieg bras eo ar re o deus lakaet ar vombezenn etre daouarn ur paotr yaouank, en dije rentet servij kant gwech gwelloc'h da Vreizh, dre ur vuhez a-bezh, aberzhet deiz-ha-deiz d'e vro ha d'e pobl. Arabad lakaad da verzher ur paotr yaouank seder, nerzhus hag emroüs a-dra-sur, med lakaad d'ober ur fazi gant tud diboell, hag a zle sammañ, int, o c'hiriagezh. Emaint bremañ o c'hourdrous an dud, labourerien eus Breizh, a yelo da labourad war dachenn Ti Voujeret. Diboellegezh difurnezh, rogoni, lorc'herezh ha sottoni. Lod eus a re a ra van da stourm ewid mad pobl Vreizh, pe a lavar e raont, n'emaint nemed o klask gweled komz diwar o fenn. Diwar goust n'eus forzh petra. Diwar goust n'eus forzh piw. Ur wech c'hoazh : nann d'ar vugeliezh ha d'an diboelegezh politikel.

Kemennadenn

(kasset da b/Pobl Vreizh gant ar C'homite-difenn a-eneb an diasezañ savadurioù-arme e Ti-Voujeret)

War-lerc'h kement hag a zo bet c'hoarvezet e Ti-Voujeret, e tiskleir ar C'homite e soñj diwar-benn marw ar stourmer breizhad, Yann-Kel Kernalegen :

- Trec'het gant gwaskerezh ar Stad c'hall, hag a laka da dalvoud he folitikerezh trevadennel e Breizh, gant harp pennoù bras ar c'horn-bro.

- Trec'het gant digasted lod, ma c'hell bezañ bet lakaet ganti da vont gant un hent na oa distro ebed dezañ.

- Trec'het gant ar vombezenn a oa gantañ, da lavared eo gant un doare direizh da selled ouzh ar stourm, ma kreder e c'hell ar gwalldaolioù degass un diskoulm da gudennoù Breizh.

O weled an arme o'n em ziasezañ e Ti-Voujeret, e talc'h ar c'homite-difenn d'e zisklêriadurioù. Anad eo ema ar Stad c'hall o klask ober eus ledenes Kraozon, hag eus Breizh en he fezh, un dachenn ewid an arme. N'eo ket homañ eo a lako ar Vretoned da gavoud labour en o bro. Gwashoc'h c'hoazh, degass a ra an arme he lod da saotradur ar vro.

E gwirionez, n'eo ket deuet an ucher c'hoazh da dapoud krog war dele Youn vras... Aon en deus bet, moarvad, pa zo bet lâret e vefe ur bern tud o c'hortos anehoñ. Martese e kavo gwelloc'h dont dre guzh, en ur vale evel ar c'hazh war an erc'h, evel ul lâer... Med bez e vo ki Youn war ewezh !

Harpet eo bet Youn kerkent gant Unvaniezh Demokratel Breizh. Ur vezh eo gweled ar plass dister-plass ar c'hi just a-walc'h-roet d'ar brezhoneg er radio hag en tele.

N'omp ket chass, ha n'eo ket gant un tamm askorn da grignad eo e chomimp peoc'h !

**E BLASS
D'AR BREZHONEG
EN E VRO !**

